

62

# GUERZ EN HENOR D'AN AUTROU SANT MAUDEZ, ERMIT,

Patron deus a baros Lanmodez ha deus paros Coatascorn.

669

Var ton : *Glac'har ar Verc'hes.*

Christenien a Vreiz-Izél, mar fell dac'h, sellaouet,  
Buez eun hermit devot a zo Maudez hanvet,  
A neveys santifiet pobl Dol ha pobl Treguer,  
Dre gomzo ha dre exempl, var ar mez hac en Ker.

Ar Sant-ma oa guinidic a proviñç Ultoni,  
Mab da Roue an Irland, an deivet deus an ty :  
Rac, an nao buguel quenta o veza bet marvet ;  
Oe consacret da Doue, quent vit beza ganet.

He dad hanvet Erele, hac he vam Gentusa,  
Devot ha vertuzus bras, a deuas d'hen plaça  
Da seiz vla en eur gouën, vit poursniv he studi,  
Enep avis tud he vro, a glasq h'en dimezi.

Doue, pehini a lenn, en creis fons ar galon,  
A guemer ar buguel-ma dindan he brotection ;  
Guelet a ra scler penos eo meurbet dispozet  
Da n'em rei oll d'ar vertu ha da renonç d'ar bed.

Digas ar ra var he gorf eur c'hlenvet al lousça ;  
A dalec ar momet-ze oe roet peoc'h deza ;  
A vianic a renonç da bompo ar Palez ;  
Nemet en servich Doue na n'em gav james ez.

Da trizec vloa a receo Maudez an tonsuren,  
Neuze gant c'hoec'h domestic a ra guir pinijen,  
En eun andret a goste demeus palez he dad :  
Pratica rejont éno a bep sort œuvro-mad.

Goude beza er plaç ze bet nebeut blavejo,  
Deus dorn Arc'hescop he vro a receo an urzo :  
Gant ardeur a gant guir froës ar bopl a brezegas ;  
Benediction an Env partout a obtenas.

En pemp cant eiz-varhuguent Doue h'en inspiras  
Da sortial deus he vro ; a prest a n'em rentas  
En abbati Sant Samson, Arc'hescop deus a Dol,  
Elec'h ma sclerias ive he vertu vit an oll.

Dindan eur certain amzer a chanch a terrouer ;  
N'em gavet a ra souden en couënt Landreguer :  
Sant Tual a ro deza neuze commission  
Da n'em livra adarre d'ar predication.

A neve flam he labour a n'em gav biniguet  
Rac nombr infinit a dud a neus convertisset,  
Goude quemeret conge digant Sant Ruelen  
Ebars paros Lanmodez a c'hoas eur Cellulen.

Mez, evit gallout muioc'h n'em livra d'ar retret,  
A quitta prest ar plaç-ze, vit beva retjret,  
Ha consacri da Doue ar rest deus he deïo,  
En euz en pehini zo dindan he hano.

Cals a loënet bulumus a n'em gave éno ;  
Ar presanç a Sant Maudez ho chasse divar dro :  
Biscoas hini aneze zo guelet retornet.  
Er poënt-ze eur servich bras a neveys c'hoas rentel.

Er c'havern en pehini ordinal a cousque  
Merq corf an hermit santel zo en deiz a hirie

Var ar mén a servije deza evit repos  
Deus he boanio, da c'hortos monet d'ar barados.

Discleria he viraclo d'ar bopl tout var ho hed  
A c'houlen cals a amzer ; unan vo rapportet :  
Rac piou a dud ar vro-ma, carguet a g'hristenien,  
Na gred a toug Sant Maudez en env eur gurunen.

Map an autrou a roas deza he ermitaj  
Goude beza bet maro, a neus an avantaj  
Da retorn c'hoas d'ar vuez, dre siconr Sant-Maudez.  
O c'hoari ganta he vreur n'en lazas eun devez.

Ar Sant-ma tost d'he gavern eur chapel a savas :  
Hac éno santelamant en c'hoec'h cant a varvas :  
He relego precius œ goude transportet  
Da Bourges, er blaves eiz cant trihuguent trivec'hvet.

Dre soign Allain, comt Pentievr hac ive deus Goëlo,  
Oe digasset divezoc'h he relego d'ar vro,  
Da Santes Mari-Beauport, en parous Plouëzec,  
Tostic d'ar guer Paimpoul, escopti Sant-Briec.

Ar verdeadet christen, deus a greiz ar mor dôn,  
A deu c'hoas da saludi alies, a vir galon,  
Ermitaj ar Sant bras-ma, rond, ous eur form henvel,  
Lec'h ma chomas daou disquipl, Tudy ha Bothmaël.

Breiz a nevez ar bonheur, en cals a ilizo,  
Da possedi eul loden demeus he relego :  
Er gueric a Sant Malo, en couënt Pen-ar-Pont,  
A oa bet cals ; mez, brema, pelec'h a n'em gavont ?

Demeus a enez Maudez a destumer douar  
Mad ous coënv hac ous bulum, na gafer quet he bar :  
Mar queret lacat eun tam ebars en corn ho craou,  
Prestic a velfot neuse a me a lavar gaou.

En Breiz-Izel a caver nombr bras a ilizo  
En honor da Sant Maudez, hac ouspen chapello :  
Deus a baros Lammodez eo ive ar patron  
Ha demeus eur baros all zo hanvet Coatascorn.

Homa a zo situet en canton Roc'h-Derrien ;  
En canton Lezardreo a veler sur e ben :  
Côtes-du-Nord a lerer deus an départamant  
Ha Lanhuon eo hano an arrondissement.

Me gomzo dac'h seulamant deus diou pe taër chapel ;  
Ma citfen tout aneze, a me ré da henvel :  
Unan zo en Peder nec, eun all en Quemperven,  
An daërvet en Plouaret, da c'hortos ná vo quen.

C'hoas me gavo dach unan, hep ré en em avanç,  
Etre Guengamp ha Begar, en paros Sant-Lauranç :  
Var terroüer Lanvellec zo eun all, evit fin ;  
Ar c'hontre-ze a ra lod deus a ganton Plistin.

Sant Maudez, c'hui zo brema en Palez an Envo,  
En recompanç, d'ho vertu, d'ho merit, d'ho poanio :  
Plijet guenac'h hon siccur en draouien a c'hlac'har,  
Evit gallout, eun devez, monet ive d'ar gloar !

# GWERS

## WAR SUJET AR C'HORF HAC AN ENE.

Speret Santel, me a c'houlen  
Ho sicour hac ho sclerijen,  
Ewit gallout gwelloc'h a ze  
Diskleria d'ec'h eur wers newe.

Hoguen hema eo ma sujet,  
Buez an den paour war ar bed ;  
Ar maro, hac ar varn goude :  
H'en gravet don en ho ene.

Me garje beza heb calon,  
Balamour d'an tentation ;  
Rac, calon an den zo frajil  
Hac an diaoul a zo subtil.

Ho buez na bado quet pell ;  
N'en deo med mogued pe awel :  
War bouez eun neuden vrein ema,  
A dor, pa songer nebenta.

Na neus quet affer a desto,  
Ewit hon lakat d'ar maro ;  
Ha, gouscoude a vo daouzec  
Hac a vo testo hon enep.

Goude gourc'hemeno Doue,  
An heol al loar vo test neuse :  
Brassa hini en assuranc,  
A vezo c'hoas hon c'honsianc.

En ifern deomp prest a speret,  
Da welet poan ar re danwet,  
Tourmantet euzus nos ha de,  
Abalamour d'ho gwal vue.

Aman, m'ar fell deomp war ar bed,  
Ni reio hon evrusdet ;  
Carout ha servichi Doue,  
Ha renonc, crenn d'ar vanite.

Biscoas David, a dra certain,  
Na Sant Per, nac ar Vadalen,  
Na deus bet lec'h da deplori,  
Ma breudeur evel a memp-ni.

Ar re-ze a voa pec'herien,  
Mez ni, sivoas ! zo muntrerien ;  
A memp laket Salver ar bed  
Er groas dre maliç hon pec'het.

Greomp wel ar Gananéen,  
Criomp, gwelomp, war bouez hon penn ;  
Criomp Jesus ha heuilomp-an,  
Ha goulennomp pardon outan.

Na gommeltomp james pec'het  
Pa vefomp gant Doue gwelet ;  
Hon Æl mad a scrivo neuse  
Hon hano woar leovr ar vue.

Evel an Autro Sant Françes  
Sonjomp er pemp gouli alies,  
A pedomp a greiz hon c'halon  
Jesus en croas ar bassion.

Diwal ta, te teod malhurus,  
Gant da speret quen orgouillus,  
Rac te a laca ar glac'har  
En env ac e war an douar.

An hini a chilaou tēdo fall  
Laquean ive quen goas all,  
Rac distrei a ra e speret  
Diwarlez an Doue assuret.

Malheur d'an hini a goueo  
Ebars en puns an abimo,  
Pini so hanvet an ifern,  
Rac precipitet vo evit biquen.

Goude ma nevo cals a boan  
O tēvi bars en creis an tan  
Eus pen vo privet 'wit james,  
Gwelet Doue hac ar Werc'hes.

Retorn-ta, pec'her malhurus !  
Retorn da gavet da Jesus ;  
Retorn da gavet da Zalver,  
Er Sacramant deus an auter.

Me bromet vi dizamaret  
Deus a lasço an drouc speret ;  
Mar zo gwir guen en ez calon,  
Vo accordet did ar pardon.

Rac biquen ene na antre,  
Certen, en barados Doue,  
Hep beza quer pur ha quer net ;  
Wel en heur ma wa badeet.

It d'ar garnel, ha goulennet  
Doare vaniteo ar bed :  
Respontet vezo dec'h, hep mar,  
A zint chomet bars an douar.

Oll mempro tud varo ar bed  
En douar zo boed d'ar preonved ;  
Ho esquern a chom er garnel,  
Quen a deu Doue d'ho guervel.

Ma breudeur ha ma c'hoarezet,  
Me ho suppli oll, hac ho ped,  
Da gravi don en ho speret  
A wers pehini meus canet.

Mar peus c'hoant da glewet brema  
Piou a neus rimet ar wers-ma :  
Eun den divalo a speret  
En Lanhuon domicillet.